

## G U E R S

EN ENOR DA

## SANTES JANNET A CHANTALL

Pehini e deus ur chapel devot e parès ar Sænt  
 etre Gourin hac Faouët, ar pardon bras  
 : noe ve d'un eil zul a vis œst,

---

TON : Santès Mari ;

## D I S K A N .

O Itron santes Jannet euz a lien en envou  
 Pelleit d'ouzomb en derzen hag en oll chlenvejou.

Tostait amâ, kristenien ; selaouet ar vué  
 En deus rênet ur santes caret bras gant Doué :  
 Quemeret-y evit squær : heuliet he exemplou :  
 Caret Jesus evel-dy ha c'hui yei d'an Envou.

Santes Jannet eus ar guer à Dijon guinidic,  
 He devoa evit kerent tud nobl ha pinvidic.  
 Mes mar voant eus an noblanç, mar ho doa madou bras.  
 Ho feis ac ho religion a voa cals brassoc'h hoas.

Abred a gollas he mam ; mæs he zad gant sourei,  
 E doujanç Doué a savas he breur, ho c'hoar ha hi.  
 Ar plac'hic a brofite eus kentelou he zad  
 Hac a greske e vertu dre ma greske en oad.

Un heretic a reas ur presantic dezi  
 Ac hi gant horrol en tan èn taulas da zevi,  
 En eur laret : evelse en ifern vint devet,  
 Mar ne changzent a greden, an oll heretiket.

Epad he oll yaouanc'his a voa squær ar merc'het  
 Dre he furnes. modesti ac he buez parfet.  
 Pellâat a re ous ar bed, ous he oll bombançou,  
 Ac alies a doste eus ar sacramanchou.

Un huguenot a c'hoantas he c'hâout evit pried,  
Ha d'er c'hemer a vije gant he c'hoar aliet.  
Un huguenot vit pried n'em bezo birviken!  
Mar zimezan, me n'ar grin nemet d'ur guir gristen.

He zad neuse a choasas dezi ur pried all,  
Un den nobl, ur c'hristen mad, ar baron a Chantall:  
O va zad quæs, emesi, c'hui peus en din choaset:  
Ho choas a so choas Doué, me n'ho tislarin ket.

Etre he fried ac hi voa peoc'h ac union:  
James ne vije clevet na trous na dissançion:  
Ur garante vras ho doa an eil vit eguile:  
En ho ztiaguez voa urs vad, cals a zoujanç Doué.

Ar beden voa e cumun bemnos ha bep mitin:  
Bep zul an oll assiste en officou divin.  
Doué a voa cherviget gant an oll tud an ti.  
Alies a yent da goës ha da sacramanti.

He fried a yeas un deis d'ur c'hoat da chasseal  
Ac a guzas creis ar spern vit gueloc'h aquetal.  
Vel ma tougue un habit liou croc'hen ur c'haro,  
Voa kemerit vit ur loën ha blesset d'ar maro.

He vignon quæs o velet an taul en devoa græt  
A grie hac a ouële, gozic a voa follet.  
M'ho pardon, o va mignon, ne peus ket græt expès:  
Ha ma fardon vo scrivet voar cahier ar barrès.

Ar Santes a pe glevas voa blesset he fried,  
A redas d'er c'honsoli ha da glasq d'ân remed.  
Ne ouëlet ket, emesan: Doué bermet an dra-me:  
En em soumetomp hon daou da volonte Doué.

Goude maro he fried ne voa mui occupet  
Nemet eus he bugale hac an dud affiget.  
O va Doué, emesi, torret peus ma liamou;  
Va c'halon oll a vo doc'h pad ma oll blaveziou.

Ur garante vras he doa evit an oll beaurieu,  
Ha gant cals a larguentes a ree an alusen.  
Reomp d'ar beaurien, emesi: bezomp trugaresus.  
Ar beaurien so hor breudeur, ha memprou da Jésus.

Bisita re an dud claon, cass dezo remejou ;  
A liès var he daoulin a banse ho gouliou.  
Pet gueich gant joa a vouche d'ho blessou vinimus ?  
Evel pe dije bouchet da houliou Jésus.

Un dimes eus ar c'haëra voa dezi proposet.  
Reüs ras en eur lared : Jésus vo ma fried.  
Hac evit deski d'an oll he guir resolution  
A scrivas gant un houarn ru Jésus var he c'halon.

Evel me voa resolvet d'en em rei da Zoue,  
He zad evit he distrei n'eur ouëla e lare :  
O va merc'h, ha possuple ve em c'huitefec'h d'am oad ?  
An diles-se a vo caos eus a varo ho tad.

Ar c'homsou-se a douchas ar verc'h carantesus,  
Ha vit consoli he zad a laras vit excus :  
O va zad muia caret, bepret me ho caro :  
Mar ho quittin vit Doué, Doué ho sicouro.

He bugale a lare : n'hor beus mui tad ebet :  
O mam quæs, chomet guenomp, n'hon abandonnet ket.  
Va bugale, emesi, Jésus vezo ho tad,  
Ac evit mam ho pezo Mari, mam douç ha mad.

Neuse he mab n'em daulas hed he gorff war treusou,  
Hac a lavaras d'he vam en eur scuilla daëlou :  
O va Mam carantésus, guenomp c'hui a chommo,  
Pe rauç quittäat an ty ma var ma chorff c'hui kerso.

Pa velas war an treusou he mab quæs gourveset :  
An dour sav n'he daoulagat, he c'halon so mantret.  
O va mab quæs, emesi, galvet oun gant Doué ;  
Red eo din quittäat peb tra, memes va bugale.

Kentis en em zaoulinas e quichen treid he zad  
Evit lavaret dezan he dihuan kimyad.  
Arru eo an heur, va zad, da heuil ma vocation.  
Kenavo, tá ha roed din ho penediction.

An tad o velet he verc'h prosternet d'he zaoulin,  
E ouël ha gant carante he sterd eus e boultrin,  
Me ra doc'h, o va merc'h quæs, va benediction,  
Pedet Doué da veza va c'honsolation.

Voar n'heur a guittas he bro, kerent ha mignonet  
Vit mont d'en em gonsacri da Zoue evit bepret.  
Sevel ras ur gouënt nevez, hanvet Visitation,  
Evit servigea Douè gant mui a berfection..

Eno a ras ar vœuion dre an urs ordrenet  
Aboissanç, peurante ha vœu a buretet :  
Ouspen-se a reas hoas evit ar parfeta,  
Ur vœu da ober bepret an traou vit ar guela.

Choaset evit Prioles, a voa squær ha reglen :  
Ar c'henta en em gave en offiç, er beden.  
Goude ur vuez santel a varvas eürus  
En eur lavaret teir gueich an hano a Jésus.

Cetu ase, kristenien, buez santes Jannet :  
Bugale ha tud youanc'h, kencouls ha tud dimeet,  
Tud consacret da Zoue, intanveset ivé,  
Desquit gant ar santes-ma peguis servich Doué.

#### PEDEN.

O itron santes Jannet, ker caret gant Doué,  
Bezit hon advocades dirac he Vajesté.  
Goulennet digant Doué vidomp bep seurt graçou :  
Pellait ousomp an derzen ac an oll c'hlenvejou.

Santes Jannet, benniguet, c'hui a gare Jésus  
Pa scrivec'h var ho calon he hano dudius :  
Obtenet dimp ma carrimp Jésus pad hor bué  
Exit m'er c'harrimp guenoc'h hed an eternité.

Santès Anna, ha sant Yan, ha c'hui sant Corneli,  
Enoret en he chapel, ni ive ho suppli.  
Oll pez hor beus a lakomp didan ho protection,  
Hor sicourit, ni ho ped, dre ho intercession.—Amen.

